



SANTES VENDROC,

PATRONES TREFF-LEZ.

CANTIC.

Ton - *Jesus, peguer bras oc.*

SELAQUIT, Bretonet;
A Vendroc ar vues;
E beo-saos eo gantot,
Meic'h Roue, Rouanes.

E pep pad eo bet
Evidomp christenien,
Eur squer meurbet parfet
E pratig hon Iesen.

Bian e voa e hoas
Ac e doa vit ar vad
Inclination vras
A qualiteou mad.

Plac'h yaouanq, he furnes,
He speret a white,
A ne veljot jannet
Grassoc'h doujanq Doue.

En he oll manielou,
 Modest ac humbl meurbet,
 Da zoue he autrou
 E consac e guenet.

Mæs piou a lavar-fe
 He zeneridigues
 Vit Jésus, map Doue
 Ac e vam ar Verç'hes.

Jesus, en bo calon,
 Sourcen ar burete,
 E puncè hon itrou
 Vendroc, ar chastete.

Var roudou man Doue
 Vendroc hed he bues,
 Chom guere'h a zesir-ge
 Hep dimisi james.

Mes d'he mam a d'he zad
 Obeissant meurbet,
 Vendroc ato squer vad,
 Outo ne rebarb guet.

Roue an Nortombry
 He goulen vit pried:
 Pebes poan evit-hi!
 He c'halon so roet....

Va Doue, emisi,
 Pa falves dam c'herent
 Ober din dimisi,
 Me a gonsant querquent.

Gouscoude, va Doue,
 M'en em saute douguet
 Eus a greis va ene
 Da viret ar vouere'hdet.

Doue oll-galloudus
 Inspirit d'am pried
 Gout ar memes vertus
 Ac e vimp guerc'h bepret.

Oud Egfrid, he phried,
 Pa gomsas da guenta
 Vendroc, guerc'hes touet
 A lavaras dezã :

Eürus, eme Jesus,
 Nep a yir ar vouerc'hdet ;
 Dan oll eneou eürus
 E vezo preferet.

Sant Joseph, ar Verc'hes,
 Evel breur a c'hoar
 E stad ar briadeles
 So bet guerc'h. Pebes gloar !

Querzomp var ho roudou :
 Conservomp ar vouerc'hdet,
 Oh ! pebes meritou !
 Priejou guerc'h bepret !...

Touchet dre he c'homson
 Egfrid, oll ravisset,
 A selaou he voeuou :
 Vendroc so contantet.

Daouzec vloas assables
 En union barfet
 Egfrid gat eur Verc'hes
 A vevas guerc'h bepret.

Egfrid a admire,
 Mui-oc'h-vui bemdes,
 Vit memprou Map Doue,
 Largentès he brinces.

Santes Vendroc a yoa
 E creis he phales
 (O tra admirapla !)
 Evel eul leanes.

Yun a rea bemdes ;
 Bemdes en oræson.
 Hor santes patrones
 A yague he c'hallon.

Fidel d'he deveriou
 Poanins a rouanes,
 E cave dangerou
 Re vras en he phales.

Gant assant he phried
 En em dena er gouent
 Ac e quitta ar bed,
 Adversour eus ar sent.

Fervant, obeissant,
 Santes Vendroc a re
 Henor ac ornamant
 Mignonésset Doue.

Cals eus he c'hoareset
 A vél prest o couesa
 En eun drouc cruel meurbet,
 Clenvet an estrancha.

Vendroc o servichas :
 Eur gourach hep he phar
 Er santes a grescas
 Ar mirit, ar c'liloar.

Neus quel a garantas
 Da veza comparet
 Oc'h hini hor santes
 Evit he c'hoareset.

An dronc he zag ive :
 He pboan so diremed ;
 Da volontes Doue
 Ezeo resinet.

Vendroc en he c'hlenve
 Oc'h eun eal so hevel :
 Laouen eo meurhet
 Dar re glân squer santel.

He Doue pa recevas ,
 He c'halon anllammet
 Dan oll a zisquesas
 He c'harantes parfet.

Er seïsvet canvet,
 E peoc'h d'he Doue,
 Vendroc, santel meurhet,
 A rentas he ene.

He c'horf so enterret,
 Herves he bolontes
 Hep diffarauc ebet
 Dioc'h pep leanes.

Dec vloas a yoa passeet
 He c'hof ebars en douar
 Fresq oll a voue cavet.
 O Miracl ! ô gloar !

Parresionis Treff-lez,
 Pebes eur oc'h eus-liu !
 A pebes patrones
 Ezeo oc'h hini-bu !

Patrones ho parres
 E deus bet obtenet.
 (Preuv eus he santeles.)
 Miraclou bras meurhet.

Pegement à flac'hou
 En oc'h ilis læset !
 Nac a infirmiteou
 Dreisi bet pareet.

Pemp bloas so tremenet
 Eur plac'h eus o quichen ;
 Gat milicin læset,
 A yoa e Lesneven.

Eun derves e lavar :
 lit da barres T'reff-lez
 Clêvet e viot hep mar,
 Pedit he phatrones.

Ar santes, invoquet
 Gat tud leun a fizianç,
 E deus o selaouet :
 A-ze eus assuranç.

Tud an demêsel-se
 A so c'hoas beo,
 Ac eus a guement-se
 Testeni vad a ro.

Eur mirael all c'hoas
 Eur plac'h a Blouzane
 Dre ho patrones vras
 A so rentet pare.

He phen e doa collet.
 En ilis a Dreff-lez
 E deus er recouvret
 Guelloc'h eguet james.

C'hui pere so poaniet
 A gorf pe a speret,
 Da vendroç recourit,
 Eprouvit he c'hredit.

O tremen, Treff-lezis,
 Selaouit eur gueric :
 Fur e ze an avis
 Taulit spleit eun tamic.

Hor santes, eme c'hui,
 Puissanta patrones !
 Neus santes eveldi,
 Vendroc eo ar Væstres.

Doae ra vezo meulet !
 Ho fizianç a so bras.
 Digant Doae eo deuet ;
 Mes selaouit c'hoas :

Baliit var he roudou :
 Guerc'h e bet a pried ;
 Evit ar priedjou
 Pebes model parfet !

Humbl en honorion,
 Pebes exempl e ze.
 Vit au oll eneou
 Carguet a vanite !

Eus ar bed retiret,
 Vendroc a ro quentel
 Da zisprijout ar bed
 A da veza santel.

Ac evit he nessa
 Oh ! pebes carantes !
 Vit ar beorien vrasa
 Peguer bras larguentes !

Imitit ar santes :
 Bezit mad dar paour ;
 Re na garit jamæs
 Nac arc'hant nac aour.

Vendroc en lie c'hilenvet,
 Abars mont dar vœz-all,
 Yoa dr'er batiantet,
 Henvel œ'h eun eal.

En ho poan ive
 patiant, resinet,
 Boloutes, gloar Doue
 Grit, requetit hepret

O santes patrones,
 Selsouit va requet :
 Ra vô Doue da james
 Douget a servichet !

